

# BREZEL AN ITALI

1859

22

Neb a bed Gwerches Remengol,  
Birviken n'en d'at da goll,



Da nep he fed gant feiz  
He ro grasou c'leiz ! ! ! ! !

Ann ITRON VARIA REMENGOL, Mam ar Vretonet,  
kurunet gand hon Tad santel ar Pab Pii Nao, an  
30 a vis Mae 1858.

Var tou : *Santez Mari, Mam Doue, etc.*

- ◊ Guerc'hes sakr a Remengol, guir Vam ar Vretonet,
- ◊ Plijet tomma va c'halou, digéri va speret.
- ◊ Evit m'a roin d'am breudeur demeus a Vreiz-Izel
- ◊ Kelou d'eus an Itali, lec'h ma man ar brezel.
- ◊ C'houi a zo, en peb amzer, advokadez ar Franz,
- ◊ P'hini d'eus laket en-hoc'h he brassa esperanz,
- ◊ Pe deus tennet he c'hleze, ha redet d'ann emgann
- ◊ 'Vit kass deus ann Itali ar bobl Autrichiann.
- ◊ Dr'ennoc'h, Patronez santel, hor zoudardet hardi
- ◊ A zo bet trec'h d'ar maro, en brezel ar Russi ;
- ◊ Digasset o deus bet dec'h, da ilis Remengol,
- ◊ Eur baniel kaer kemeret en kær Sebastopol.
- ◊ Cetu hint éd adarre d'en eum gann en tu mad,
- ◊ O ped truez eus daelou ho c'hoar, ho mam, ho zad,
- ◊ Pere a c'houlen ouzoc'h m'ellint pokat d'he c'hoas,
- ◊ Ha dont gant-he d'ho kueleit, devez ho pardon bras. ◊

Breiziz ker, kent ma teuin da gomz eus ar victor  
A zo, kammat ha kammat, oc'h heuil tud an Arvor,  
E rankan dec'h lavaret perak ar Francichen  
Zo ed da gemeret peurs er brezel zo o ren.

Brema e zeuz eunnek vloaz, tud foll, pennou re domm  
A c'houezas tân ar revolt er gær demeus a Rom  
Evit diskar eus he dron Tad an oll gristenien,  
Hag ellout ervez ho c'hoant lakat douj ho lezen.

An Tad santel a dec'has dirag an disurc'hou,  
Eb lakat he zoudardet da implij ho armou :  
Mes gouarnamant ar Franç a gassas dek mill den  
Da zikour renta dious-tu d'ar Pab he gurunen.

Impalaër an Autrich pa velas kement-ze  
Da vikel bras Jezuz-Christ a gassas eun arme  
Var digare hen dional, eus ar vanden impi,  
Mæs o sonjal ma vije mestr var an Itali.

Hag holl rouanteleziou ar vro Italian  
Ouspen ma zeus kalz ané a zo c'hoaz goal vihan,  
Dre-ze aben ugent vloas, an Autrich a elle  
Ho c'hemer, vel amezeg, an eil goud' egile.

De ha de ec'h avance varni 'vel eul leon,  
Ha gant-han al læronzi, ar vuntr, an drahison,  
Goasset, groagez ha merc'hed, ho daouarn d'he staget,  
A doliou bas, en Milan, a zo bet holl lazet.

Puissanzou bras an Europ a skuisas o velet  
Eur vro ken kaër en drubuil, eb kaout repos ebet ;  
Kinnig 'rejont d'an Autrich dont d'en em assambli  
Evit goud penos lakat an urz en Itali.

Impalaër an Autrich, faro gant he bouar,  
Dallet dre ar c'hoant destum, a ras skouarn bouzar ;  
Eun arme vras a zavas hag a lakas da vont  
Var douarou hor mignon, Roue ar Piemont.

Ar Piemont en eum gaven en nord an Itali,  
Menez Alpez en trezomp a ra an disparti ;  
Poent e oa kas soudardet betek hor frontieren  
Pe 'vije deut an Autrich da zebi hor souben.

Gant hast ar gouarnamant a deuas da c'hervel  
Tud kalonek an Arvor, soudardet Breiz-Izel ;  
Da voues hon Impalaër ouспен daouzeg mil den  
A zavas, prest da vale, evel unan ebken.

Mæs, arog kuitad ho bro ezint n'em glevet holl  
Evit dont da gimiadi euz Guerc'hes Remengol,  
Ar genta, goude Doue, e gloar ar baradoz,  
Patronez muia karet, ha mam hon tadou koz.

Cetu hint deut da ilis, gwir *Vam an oll Remed*,  
Templ gand ar roue Gralon ha Guenole savet,  
Ti santel en pehini Rouanes an envou  
A ra, 'vit he bugale, ar brassa burzudou.

Ragtal, e treid an oter, e kuezont d'an daoulin  
'Vit pedi a greis kalon Stereden ar mintin

Da lugerni noz ha deiz var benn an dud he c'har,  
Ha d'ho hench, deus an env, var vôr ha var zouar:

- Gwerc'hes Vari, emeze, princes vras an æle,
- Ho servicherien kenta, Gralon ha Guenole,
- O deus gred dec'h an templ ma, ken kaer ha ken huel
- 'Vit selaou hor pedennou, ha divoal Breiz-Izel.
- Cetu ni holl adarre o vont er mez hor bro,
- Ni lavar dec'h, Gwerc'hes vad, ken a vo en distro ;
- M'ar homp lakit da drec'hi an Autrichianet,
- E tigasfomp d'och ilis eur baniel d'he tapet.... »

Sevel a reont neuze, gant ho guialen ven,  
Da vont, hini hag hini, da bokat d'ar skeuden ;—(ann imaj)  
P'o devez ive poket da relegou sænt Breiz  
Ereont, gant eur feiz vraz, teir guec'h tro an ilis.

Goude beza n'eum vouestlet a gorf hag a ene  
D'ho fatronez gallouduz, pep hini aneze  
En deuz laket binniga, evit beza douget,  
Eur vedalen burzudus eus *Mam an oll Remed*.

Arog mont deus an ilis hint chomet sebezet  
Dirag eur baniel neve gant aour ha perlès gret,  
Ha digasset deus Paris, abeurs Napoleon,  
Pini zo en em laket dindan gouard hon Itron.

Kuitat 'reont gant fizians en Mam an oll sikour,  
Mes arog koll ar guelet demeus a veg he zour,  
E kouezont var ho daoulin, vit ar vec'h diveza,  
Hag e kendalc'hont laouen ho hent en eur gana.

Aben teir zizun goude e oant dija erru  
Er vro el lech ma klie bea an emgann ru ;  
Evel en eur zer-lagad ker prim hag al luc'het  
Hint en em gavet dirag an Autrichianet.

D'an nao demeus a vis mae, Napoleon trede,  
A zo ed d'en eum lakat er penn deus he arme,  
En eur fiout he bried hag he vab c'hoas bihar  
En nerz hag en karantez tud leal ar vro-man.

D'ar c'houezek ar memeus mis, kant adversour barvek,  
Evit diskuel pegement ezint tud kalonek,  
A zo deut dreist eur voger, en noz ha kuezet stard,  
Var eiz zoudard eus a Franz, a voa oc'h ober gard.

Bet ho devez ar goal chans d'ober eun dro c'hollo ;  
Mes, dan ugent, en eul lec'h hanvet *Montebello*,  
O deus kredet 'n'eum digoll deus ho zol diagent.  
En eur gass var hon arme pemp mil den varn'ugent!

Ar zeitekvat bataillon chasseourien var droad  
Gant eur pevar regiment, leun a zoudardet mad,  
Gant ar general Forey, pemzek mil den ebken  
A oa karget da zerc'hel penn d'an adversourien.

Mes bugale an Arvor, an dud-ze ker kalet  
Ha ker leuniet a fizianz er Verc'hez binniguët  
Deus ho bruched, o tridal, a den ho medalen ;  
Pokat 'reont c'houek dezi, ha kerkent.... *tor he benn !!!*

Var kement zo diraze e saillont 'vel tigret,  
Pep tol digante a zrail an adversour spontet  
Ha red dezan n'eum denna goude eur stourmik ber  
Gant daou vil den mac'haignet. Ni, daou c'hant prisonnier

Deg devez just, goude ze, en tachen *Palestro*  
Gand an drede regimant a zouavet d'ho zro,  
A dolliou baïonettez an Autrichianet  
A zo darn ane lac'het, ha darn all zo beuzet.

C'hoec'h kant prisonnier zo gret var an adversourien,  
Eb implija ar vindrail hag eb loskeul eun ten ;  
Kanolliou an adversour zo ive kemeret ;  
Ra vo bepred an drede a zouavet brudet!.....

D'ar bevar a vis even, var dachen *Magenta*  
E ze bet ar stok spontuz hag an emgann goassa ;  
C'hoec'h ugent mil adversour oa n'em gavet eno  
Evit klask trec'hi eur vech soudardet kre hor bro.

Tud kalonek an Arvor, kent evit skei ho zol,  
A stard deus ho muzellou medalen Remengoll ;  
Ho feden gant ar Werc'hez a zo bet selaouët :  
*Ugent mil Autrichian a zo gante lazet !!!....*

Tri ganol ha daou vaniel gant seiz mil prisonnier  
A zo deut ive gante en eur memeuz amzer ;  
Tud kalonek Breiz-Izel n'hint ket vit mont da goll  
Eur vech' m'hint enem voestlet da Verc'hes Remengoll.

Eur breton Ian-Mari Menez, a Plourin-Montroulez,  
Kasset en eun hospital da barea he vlez  
Goude var park an emgann beza gred eun tol kaër  
En deus recevet ar groas a zörn an Impalaër.

D'ar c'hoec'h euz a vis even er ger gaer a Vilan  
Skuzet gant goalen ouarn potret Autrichian  
A zo en em revoltet, hag an adversourien  
O deus zavet skanv ho zroad dre n'ellent erzel ken.

Kanolliou a zo chomet varlerc'h an adversour  
Kouls a daouzek mil fusuil ha koufrou leun a aour ;  
A brizonnerien ive e zeus eun niver bras ;  
Ema a zo eun devez 'vel n'eus ket guelet c'hoas.

D'an eiz deus a vis even, gant hon Impalaër  
Roue bro ar Piemont zo antreet en kær  
Deus a bini an oll dud o deveus recevet  
Gant eun triomf ar c'haera princet ha zoudardet.

'Vit trugarecat Doue ha Gwerc'hes Remengol  
Da vea gred dan Autrich tec'hel dirag an holl,

E katedral'kær Milan, dirag ar bobl stouet,  
Eun *Te Deum* ar c'haera zo bet neuze kanet.

Da vouel Sant Ian-Badezour, kerkent a peder heur.  
Var bord ster ar *Mincio*, e zeus bed, va brendeur,  
Eun emgan ar spontussa, eul lac'heres eûzus  
Etre an enebourien hag hon tud ken nerzus.

Ouspen kant anter kant mil soudard Autrichian  
Dispaket var hed pemp leo en eur blenen ledan  
A sonjas, dre finesse, diskar hon zoudardet;  
Dre c'hraz Doue hint bet c'hoas er veach ma diskaret.

An emgan 'pad daouzek heur a voa tòm hag ingal,  
Eb beza trec'h en tu ma, nag ive en tu all;  
An diou arme 'kreiz an tan korf a korf a voa krog,  
Eb n'elle den mont a dre, na mont var an arog.

Eur bæleg koz eus a Vreiz, dispaket he vleo guen,  
Enem strinkas dan daoulin neuze 'kreis ar boultren;  
Evel goechal Moïses, e savas he ziou vrec'h  
Evit goulen d'hon arme nerz ha sikour an ec'h.

Kerkent soudardet hor bro a velas ar skeuden  
Eus ho fatronez santel aseet var eur goabren,  
Neuze, laouen, d'an daoulin ezint n'emp strinket oll,  
En eur grial : *Meuleudi da Verc'hes Remengol !!!.....*

D'ho medalen e pokont..... ha dao neuze dispar.....  
Tregont mil Autrichian a gouezas d'an douar.....  
Evit ar bevare guec'h o deus gouet pen da-ben  
Pegen terrubl e potr Breiz pa lavar : *tor-he-ben.....*

Eun arne ar spontussa, kurun, avel fol, dour,  
Dichadennet gant Doue, a deuas d'ho sikour.....  
Impalaër an Autrich o velet eur seurt tro,  
A dec'has deus an emgan eb laret ken a vo....

Gloar, hënor ha meuleudi da Batronez hor bro,  
P'hini e deus biniguet emgan *Solferino* :  
Ra vezo bepret karet, ha meulet er bed oll;  
Mam dener hor soudardet, Guerc'hez sakr Remengol !!!...

Pebez burzud eo heman !... an daou impalaër,  
Goude ar brassa brezel a zo mignonet ker...  
Ar goad ne redo muioc'h, ar peoc'h a zo sinet,  
O Guerc'hez sakr Remengol, ra viot c'hoaz meulet !!!

Sehit, sehit ho taelou, mamou karantezuz,  
Soudardet vad Breiz-Izel, ho mibien galloudus,  
Goude beza gonezet en emgannou, bep tro,  
Gant hënor ha levenez, ez int erru d'ho bro!...

P'ho bezo bet an eur-vad da bokat d'ezho c'hoas,  
It da ilis Remengol gant-ho d'ar pardoun bras;  
Grit teir gwêch an dro d'he-zi, en eur bedi gant feiz,  
Ha pokit ive, gant joa, da relegou sent Breiz...



E touez ar belerinet, diredet a bep tu,  
Hor soudardet kalounek, gant ho brageier ru ;  
E korf ho rochet gwadek, diarchen, diskabel,  
A vo er brosession gant **BANIEL AR BREZEL!**

Eur baniel ken enorabl, gant boulejou toullet,  
A vezo gand an holl dud baniel ar peoc'h hanvet...  
Gloar da Zoue en envou, ha peoc'h d'ar bed hol,  
Gloar, meuleudi da viken da **Verc'hez Remengol !!!...**

Tud leal a Vreiz-Izel, tud kalounek va bro,  
C'hui evit pere kalir ar vuez zo c'huego,   
Joa deoc'h var an douar ha graç digant Doue  
Da visita Remengol, ar sourzen a vuez.

Pedit en ho klevejou, pedit en ho glac'har,  
Ha pedit en holl boaniou hon eus var an douar  
**BRASSA SANTEZ ZO ER BED, GUERC'HEZ SACR REMENGOL;**  
Mar bezit devot dezi, biken ne deot da goll.

Tadou kes, mammou tener, c'hui holl pere a zo  
Ankeniet gant ho mibien ed pell demeus ar vro,  
Deuit da ilis Remengoll, **ILIS AN OLL REMED,**  
Hag e vo ho pugale er gær deoc'h c'hoas rentet.

### **Peden d'an Itron Varia Remengol.**

Gwerc'hez sakr a Remengol, Patronez Breiz-Izel,  
Pedit 'vit ar zoudardet zo en tãn ar brezel,  
Pedit evit Breiz-Izel, evit ar Vretonnet  
O deuz ho karet, ho kar, hag ho karo bepret.

Kenniguet gant Barz Itron Varia Remengol,  
d'he vignon ker Kloarek koat-ann-noz.

E Remengol an naontek a viz even 1859, da zul an Drindet, devez Pardon  
Bras ann **ITRON VARIA REMED-OLL**

(Propriété.)

**LESCOUR.**

